

Le 980 B pourrait bien n'être que la 2e feuille de cet exemplaire  
non mentionné au 837 OLLIVIER

# KIMIADOU

## EUR MARTOLOD A VREIZ

### Chanson Nevez

Var ton : An drouc-Hirnes (le mal du Pays) Cetu ar flick a flock

Bretonned, me o ped, didosted da glevet  
Eur himiad truezus, eun adieu trist meurbet  
A ra de guenvrois quen monet d'ar brezel  
Eur martolot yaouanq maguet en Breiz-Izel.

An eis varnuguent a viz maë me oa en faction  
Oar bont ma batimant bars er rad e Toulon,  
O hortos partia vit mont d'an Itali  
Oar ben tri de goude, e clemp ambarqui.

Me gred a oa tremenet an eur a hanter noz  
A ma hamaradet oa et da repos ;  
Netra na double neuze ar silanç deus a noz  
Met ar mor e vurmuri gant eur voues rust a gros.

Ma daou sorn a oa harpet oar ma c'harabinen  
Dindan ma sreid ar mor bras ac an envrus dam fen  
Heusi ran mignonet pa deuan da gompreñ  
Na ve tre'n den ac ar maro nemet treus eur planquen.

Pa n'em velis me hunan oar bon va batiment,  
Ep test deus ma glahar, nemet ar firmamant,  
Me gommances hirvoudi gant glahar ac anquen.  
Pa deuas da jonj din a baros Trabien.

Ma daoulagat oa troet oar su ar vilagen  
Lec'h a ma da guenta guelet ar sclerigen ;  
A pa deuis da jonjal em herent ac em bro  
Gant an daour deus ar mor n'em vesque ma daëro.

Aboue an deves fatal a meus renquen quittat  
A dont da quimiadi deus ma mam a ma sad  
Bep nos pa ve cousoquet em hunre o goëlan  
Ac o jonjal'n o glac'hар, noz a de a ouelan.

O devez leun a c'hlahar, o sisesper c'hoëro,  
O devez deplorabl a carguet a canvio,  
O quimiad anquenius a glac'hарus meurbet  
Me mo jonj ac'hanout queit a vir oar ar bed.

Gant ma herent er guer e ma nehamant  
Hi ra ma ollo chagrin a ma brassat tourmant  
Penoz annonci de han breman d'ar brezel  
Aoun meus d'o lacat gant an nec'h da vervel.

Pa glevont quement se a devout calonad  
Goasoc'h vit an devez a renquis o huitat  
Ac hi devo couraj a oalh vit gallout supporti  
Ep ma ranno o halon gant eur c'hezo quen qri.

Houi sperejo evurus, o saent a sañseset,  
Itron-Varie-Drue, ma guir vam beniguet,  
Reit de ners a couraj en affliction,  
Reit de o assistanç, confortet ho halon.

Pelec'h eo et breman querent a mignonet  
An amzer-se quen douç hac agreabl meurbet  
Pelec'h ma et breman an amzer eürus-se  
A oan en Trabien a no touesq bemde.

Niget e pel d'ouzin an amzer quen eürus  
A oan sambles gano'ch, camaradet joaüs,  
Tremenet e vidon, marteze vit james,  
Ar bonheur ac ar joa n'emp tanvet assambles.

Pa sei an nevez amser da gargant adare  
Ar guez a vleuio caër ac a selio neve  
Pa seui e oar e his ar guenidel er vro  
Na nimp muin assambles beb sul d'ar pardonio.

Pa oan en o touez oan joaüs a laouën,  
Mes breman on mantret, siouas ! gant an anquen,  
A ma oll flijadur so bout neur plaç disro  
O sonjal gant glahar em herent ac em bro.

Choui a velfe breman Yvonic o mignon  
O paourman e hunan oar ar rad e Toulon.  
O pourmen e hunan alies tal a nod  
A daëro e zaoulagat a red var e siouchod.

Me ve c'hoas alies aseet oar eur roc'het,  
Ma daoulagat troet evar su Breis-Izel,  
Mantret gant ar glac'hар, a beuet em daëro,  
O sonjal em herent so er guer en canvo.

O douar a Vreiz-Izel, o ma bro biniguet,  
Pegouls a sono an eur ma c'hin c'hoas d'ho kuelet !  
Pegouls a erruo ar momet ac an de  
A seuio da laquat fin dam c'haptivite ?

O deves leun a souzier, deves a eurustet !  
Me so chonjal enout beb heur a beb momet ;  
Doue trugarezus, hastet ar momet-se  
Ma hin c'hoas da velet ma bro a ma c'ontre.

Tre ma oan o teplori oar bont ma batimant,  
Ar loar a darsas souden ebais er firmamant ;  
Neuse me a velas us d'am fen o njel  
Eur guenidel bian evar su Breiz-Izel.

O! prest din me, eonic, prest din da sivesquel  
Ma ningin en ez plaç da bete Breis-Izel,  
Da gonsoli ma herent quent vit quitat ar Franç,  
A degas betec eno comsou a esperanç.

Mes allas ! me n'allan quet veldout treuzi an aër,  
Me a renq chom aman evel eur prisonnier,  
Evel a oa guechal an Israëlitet,  
Pel amser o hortos an douar prometet.

Martese feus, eonic, scuiset da sivesquel,  
O nijel dreus d'ar mor, o tont deus eur vro bel ;  
Pleg eta da esquel a so bet pel digor,  
A repos eur momad en quichen mab Arvor.

Disquen eta, eonic, eur momet em c'hichen,  
Ma scrivin eur lizer da gass da Drabien ;  
A pa meus quel veldout ar bonheur dont d'ar guer,  
Te vo da viana vidon eur messager.

Querquent evel ma vi digaoet en Breis-Izel,  
Te vo, eonic bian, ma messager bian ;  
Ta rei ma gourhemen er guer pa erruzi,  
Ac a Irro dam zud a han d'an Itali.

Grit ma gourc'hemoно d'an tad neuz ma maguet,  
Mae allas ! da main baour, da houes na ri quet,  
Rac boe zon partiet demeus a Vreiz-Izel,  
Eouet da jouissa deus ar gloar eternel.

Lar adieu d'am broudeur a d'am c'hoarezet,  
Goude d'ar belec coz a neveus ma badeet,  
Na ancoue hini bet demeus ma mignonet  
A lar de a sonjan enno en peb momet.

Lar de, eonic bian, pedi vidon peb nos  
An Itron-Varia, patrones ma faros,  
Na deui d'am preservi en creis en dangerio,  
A ma rai din ar c'hraç da retorn c'hoas d'am bro.

Mar a teufe dit c'hoas, pa vi en Breiz-Izel,  
Rancontri eun deves ma mignones fidel,  
Lar dei a fo guelet Yvonic e mignon,  
Hoher gard eun nosves oar e lest en Toulon.

Assur dezi er fad, dre broposiu touchant,  
Meus bopret eviti eur garante ardant :  
Lar dei a ha breman ma c'horf d'an Itali,  
Mae mac'halon a vo da virviguenn ganti.

Pa zei a neves amser te a iel alies  
Da gana, da fredoni, da guichen hi frenes ;  
Perac ne allan me nijel eur vec'h guenoc'h  
A mont de saludi betec e zi vel doc'h !

Mæs gra chars em flag, a lar dei dre da son  
Derc'hel jonec da viquen demeus e guir mignon.  
Pec'hini zo, allas ! pell deus a Vreiz-Izel  
En eur lest oar aa mor foetet gant en avel.

Pa vin en Itali en creis ar c'hombajo,  
Creis an tan, ar mitraill, a cros ar chanonio,  
Neuse eo a teuio ar muian da jonch din  
Deus ar amzer eurus so nijet pell d'ouzin.

Mar teu din da vont tied gant eur boulet traitour,  
Ac achui ma deio en eur vro estranjour,  
Neur gouen d'an douar c'hoas quent evit mervel  
Ma daoulagat a dro evar zu Breiz-Izel,

Ma daoulagat a dro evar zu Breiz-Izel,  
Da laret d'am c'herent e adieu eternel,  
Querent a mignonet, c'hui laro gant glac'har.  
Graç dean digant Doue da repos bars er gloar.

Quent evit finissa goulomp digant Doue,  
Vit ar martolot quez bep sort prosperite ;  
Pedomp a vir galon Roue an armeio  
D'em preservi e creis quement a dangerio

Offromp c'hoas on veuio da Stereden ar Mor  
Vit an oll soudardet deus on bro gær Arvor ;  
Goulomp gant confianç pedomp hi gant ferveur  
Da bellat dioute peb goal chanç a goal heur.

Rentomp meulideuguez da arme gær ar Franç,  
D'hon Prinç quen generus a leun deus a vaillanc,  
Pere guttat o bro vit mont de gombati,  
Evit independanç oll pobl an Itali.

Canomp breman n'eur voues, canom tout assembles  
Ra vezint enoret meulet da james ;  
Canomp ta, Bretonnet, deus fons on c'halon,  
Gloar ac enor d'hon arme ! Vive Napoléon !

Neb a neus composet ar son ma pen da ben  
So ganet a maguet en paros Trabien.  
A neuz he c'homposet oar an ton di c'hana,  
Canet-hi ta, Bretonnet, vit n'em divertissa.

# RÉCIT

*Gret var sujet ar Religion arc'hant a gundu ar Veleïen*

## Var an ton a zezirot

Tostaît habitantet, da glevet va reglen,  
Hac a buez var va buez, pa deuan da gompreñ,  
Casset e meus va speret, partout dre rouantelez,  
Ne velan nemet poanniou, glac'har ha tristidiguez.

Doue lavaras d'he ebestel, sentit deus va avis,  
Me ne c'houllennan ket arc'hant, ac a ro dec'h en gratis,  
Evit prezec ar Religion, dre ar bed universel,  
Hac ar re ezelaoou a gredo an Aviel.

Beza meump eur bec'h pounner, entrezomp kristenien,  
Ne velan den espernet, nemet ar velein,  
Ar re ze var o c'hondou, o deus diskuellet seler,  
No deveus tam da souten, demeus ar bec'h pounner.

En amzer ma momb o ren, e man ar velein,  
O clasq lakat ar polie, en plac an archerien,  
M'ho dije bet otorite, e vijent bet cals goassoc'h  
E vijent juge, ha greffier, ha Mair en pep parros.

N'ho deveus na gouel-Miquel, na contribution,  
Netra d'en um separi, evit toach o c'halon,  
Bea o deus ho fancio, digant ar Gouarnamant,  
A c'hoas e teuont da boueza, var groaz ar paisant.

Eur c'hoarec en he barros, pa vezog beleguet,  
N'en em blij ket ho koseal, gant ar baïsanter,  
Nemet heuill an noblançou, ac ive ar vanite,  
Ne zonch mui en bues Jesus, nac en'he baourente.

M'ho deus c'hoant ar velein, da lakat o c'haret,  
Ne glefent James sourcial, deus affer den ebet,  
Mes lavaret ho fedennou, gant guir devotion,  
A derc'hel zonch a Zoue, ebars en ho c'halon,

A pa e maint en e blag e klefent sonjal ennau,  
A lezel a malicou, ac ive madou ar bed man,  
Mes allas o c'halon, zo stag eus an arc'hant,  
Rac ne reont mui netra, hep kavet paemant.

Pa vez ganet eur buguel : er c'hasser da vadesi,  
Arc'hant en devezo ar belec, evit e gristen,  
Pa vo sonet tout ar c'bleier evit ober ar vadisiant.  
E renker rei d'ar belec, adarre eur somm arc'hant.

Ar c'his so gant ar gomperien, goude an *Te Deum*  
Da rei dan dud a illis, goude paea ar person.  
Goude p'erruo en oad, evit ober e baskou,  
E vo hanvet gant ar person, da zougen an drapoiou.

Dindan neubeut amser goude, e tougo ar Religo  
Mes paea e vezog ret, eur vech vo fin d'an dro,  
Evit dougnem imach ar Verc'hes ebars er procession,  
Ar merc'het ive a renq paea, de zeves ar pardon.

A pa erruer'hars en oad, da roulla ar yaouanqis,  
Aroq contracti assembles, eo ret mont d'an illis,  
Pa vezor en oad breman, da veza eureujet,  
E kasser an embannou, da betec ar belec.

Mes breman mar d'oc'h kerrent, e renket et tenna dispanç  
Rei d'ar belek eur somm arc'hant, arok en em avanc,  
Neuze kemero an embannou, evit publica teir guech,  
Mont a raïs deus ho kodel, peval real bep guech.

Pa ver embannet teir guech, ebars er memes tro,  
E renkforc'h paea en doubl, daou skoet dec'h a gousto,  
Choeze real an oferen, vo red deoc'h da baea,  
A pa vele deg eured, e toucho memes tra.

Aberz statou ar Zent, e touchont arc'hant bras,  
A kals deus ar vreuriesou, zo formet gante c'hoas,  
Breuriez probagation ar feiz, en touez ar galotikel,  
Formet gant ar velein, deg real a daou ouennec.

Daoust an arc'hant se ive tout, na pelec'h a ielo,  
Marlez da orni an illiz, credet neb a garo.

Eul lezen all o deus c'hoas, ebars en ilisou,  
Da zevel eur somm arc'hant, demeus ar c'hadoriou,

Ar c'husum sc a gavan, a zo gueil excellant,  
Pepini ve servichez, pa ve prest e arc'hant,  
A re n'ho deus ket arc'hant, da gavet cadoriou,  
A renko chom en o za pe schlucha var o boutou.

Ar velein o deus breman, an oll finesseou,  
Da dapout pinvidic a paour, tout dindan o droajo ;  
Kester a kesteres, e maint en pad ar blosa,  
O tastum neud ac arc'hant, heb renkout ho face.

Evel eur procession, e maint bep zul o kestal,  
O tastum neud ac arc'hant da gag d'ar presibal,  
Betec ar beorien baour, a renq prena eur guden,  
Evit rei da blac'h an tass, pe gool o aluzen.

Ne var sujet ar c'hestou, a ra breman ar velein,  
Beza o deus meur a feçon, da ziveada ar beorien,  
Ac enpad mize maë ive, vez quelet ar groagueou,  
O tota da guestal an amann demeus a bechadou.

Betec da dy an intanvezet, o deus kals a vugale,  
N'ho deus nemet poan ho divrec'h, da c'hounit bara de,  
Pa vo erru ar viou frivet, dirac an autreu person,  
E c'heller lavaret e man, goad ar paour var e galon.

A neuze e prezego, maximou sant Stéfan,  
Désirout vad d'ar re all, guelloc'h deso ho unan,  
C'hoas o deus an ardiegues, da staga kezec a kar,  
Da vont bep blosa da guestal, betec ty ar feurmier.

Ret vo c'hoas cavet tud puissant, evit o escorti,  
Piou e ves deus ar barres ha gredo ho refuzi,  
Nep a raij qément-se, int a zalc'h sonch mad,  
Tremen a rain dre ar presbytal, abred pe divesat.

O quelet ran o tostaat, evit antrem em sy,  
Ac elec'h zouten ma c'hoas, e poeson varnezi,  
Debonjour dec'hui Pipi, ha dec'h ive Jeannel,  
Cetu ni erru daou, betec ho ty d'ho kuelet,

Da c'houlen diganec'h mar plich, e guest d'an autreu person,  
Herves ma man arc'hustum, mes n'eo qet eun aluson,  
Allas eme ar feurmier, ne allan lavaret netra,  
Rac va yalc'h a zo re skan, va gouel Mikael da baca.

Neubeut arc'hant a meus gret, certen demeus an ed,  
Neubeutoch deus a loenet, rac ne meus qet a voued,  
Mes rei a rin dec'h un tam, demeus va ed guella,  
A gouscoude e chommo, va goued-Mikael da baca.

Ni c'hommo da languissa, enpad an oll amser,  
K'en a blijo gant doue, hon lemel a vizer,  
Oh ! nan eme ar person, beza zo en abondang,  
N'en deus netra da fiziout, nemet er Brovidanç.

Mont a reont dre ar parossiou, da guestal, ar velein,  
Evel ar beorien ezomec, da glask an aluzen,  
Ne vesont ket ar bed-man, certen James contantet,  
K'en o do gret o fortun, hac o yalc'h beurgaguet.

Ne vo quet pel e vo gante, ma ne lakaer evez,  
Hanvet an oll illizou, an ties a gommere,  
Kouea ra eme arc'hant evel ar boulezo,  
A deu deuz ar mitraileuz, ebars e c'hombajo.

Breman vez ar velein, ebars er zant lec'hioù,  
Evel ar varc'hadourien, o verza canticou,  
Betec ar bara bemiguel, ebarz en oferen bred,  
Ar re ar guemero un tam, dezo, e koust eur guennec.

An oll a deu da laret ar guiriou franchamant,  
E man gant ar velein, Religion an arc'hant  
Ne laverfent quet eur beden, anez e paeet,  
Depiterien pedennou, d'hor Zalver benninguet.

Breman e tisclerian dec'h, selaouit arc'hanon,  
Monet a ran da goms dec'h, var artiel ar maro,  
Eun den pa vez dececed, e zer den declari,  
Arc'hant a gousto adarre, evit en enterri,

Deus abers ar servichou, e touchont eur somm arc'hant,  
ENN annuel, eizvet, ac ouspen eun testament.  
Eun oferen anterramant, hac eur servich bras sur,  
Aben eur pennad goude, e vo var ar beden zul,  
Ar veleien zo paeet evit ho labour en illiz.  
A ne glefent quet questal, nac amann, na guiniz,

Pa eo ho fae dê cresquet, da gant ar Republic  
E clefent en em gontanti deus plaçou manific.

Breman en eur finissa, me lavar d'ar veleien,  
Ne glefent kent klask honoriou, nac ive madou monden  
Nemet heuil an aviel, a buez ar Messias,  
Pa deus kemere ar gark da veza en he blaç

Entrezoc'h oll kristenien, kement zo deus va c'hlevet,  
Dalc'hit sonch en buez Jesus, hac en he Vam beniguet.  
Evit goude hor maro, ma zefomp oll da repos,  
Gant ar zentac en elez, en gloar ar Barados.

# DISPUT ETRE AN OTROU HAG AR PAYSANT

## Voor ton : Ar roue Gralon

### An Otrou

Pa deues da zadorn en kær  
Et clefes caout eur botou ker,  
N'em em glever ket er marc'had  
Gant an drous deus da voutou koat

### Ar Paysant

Ne ket goal iac'hus a gredant.  
Caout eur boutou ker er gouan,  
N'eller quet gante voyagi  
En touez ar fank hag ar pri

### An Otrou

Me voor n'elles quet ho douguen  
Evit passeral ar vouillen  
Mes, pa ves prest d'antren en kær  
E clefes chanç a voteyer

### Ar Paysant

Ma tifisken va voutou groz  
E renkfen ho lesel er foz,  
N'all'an ket em dorn ho derc'hel  
N'ac ho fourra doum em godel.

### An Otrou

O te zo eun den simpl! perac  
Ne glasket ket eun ty bennag,  
Evit lezel da boutou koat  
Ken a deufes deus ar marc'had.

### Ar Paysant

Evit eun ignorant ma zont  
Nousoc'h ket gueiloc'h evident;  
Peguen zunet a ze hirie  
A baysantet a beb coste.

### An Otrou

Caout a rafes evit netra  
Eun ti da vont er pad a bla  
N'eus fors pe sort hostis er vro  
A ve contant d'ar recevo.

### Ar Paysant

A ne bean ket vs disken  
A coustou din diou lipaden,  
Penos e c'halfen me eva  
Pa meus poan ho caout bara

### An Otrou

An den ar muis ezomec  
A ell c'hoas dispign daou vouennec,  
Ha te ne n'out ket er viser  
Pe zougouen eun habit merser.

### Ar Paysant

Abalamour d'am guiskamant  
N'ellant ket ilippa la arc'hant;  
Daou vouennec ar zun, el leal,  
A zo bep bla uguent real.

### An Otrou

An avaristed va mignon,  
A zo me gred en no kalon,  
Eur pez ugquent real a bla  
Cant on oll a deu hag e ya

### Ar Paysant

An ini a zo leun e skudel,  
Ha na ra sort deus e c'holde  
A zo brao dean coseal,  
Var position ar re all.

### An Otrou

Herves da gomzo e sonj din,  
Et teus c'hoant da zisputin ouzin :  
Ma teus cals a boan en da stad :  
Ni renq ive labourat.

### Ar Paysant

Pel goude ma ven var bale,  
Chui ve cousket en ho kuele,  
Ha pa vo varnomp ar c'huezen  
Chui ve trankil e pourmen.

### An Otrou

Pep hini e deus e vicher  
Mar e c'heus eul labour pouner,  
Me a bromet did n'en de ket,  
Ken dies hag ar poan speret.

### Ar Paysant

Pardonnet din, aoutrou bemde,  
Me meus an eil hag eguele ;  
Poan a meus el labour dija  
Ha poan e c'houd penos beva.

### An Otrou

Ma zeus commananchou er guer  
Marc'had mad evit a gaver ;  
Guelet a meus evit cant scoët  
Douar tregon pelevarset.

### Ar Paysant

Me voor zo bet, met n'eus mui  
Ar boe ma man ar mestri  
O kreski demp kement ar hec'h  
Ma rekomp debi bara sec'h.

### An Otrou

Goud a ran c'heuz bara du :  
Mes respont ac hanon dioustu ;  
Ma vef a bevet delicat  
Penos e c'halles labourat.

### Ar Paysant

Chui sonj d'ech ma me bara guen  
Kik rost, guin coz, zaladen,  
N'elfent ket labourat ker c'houec  
Na poannia muioc'h callonnec.

### An Otrou

M'an ar cher vad pa d'eun ty,  
A zoug an den d'an diegi ;  
Hag eur paysan goel dispigner  
A zo voud abred d'ar viser.

### Ar Paysant

Ne c'houennan quet caout frico,  
Evel an dud vrás deus ar vro,  
Mes beva ordinal en kresq,  
Bara mad, kik a souben fresq.

### An Otrou

C'hoant a deus reï da gredi  
Ne c'heus casi sort en o ti  
Mes da figur din a ziskuel  
Ne res ket c'hoareis bemde.

### Ar Paysant

Goude ma meus roet arc'hant  
Dam mest ha da gouarnamant,  
Ne c'hom ket ganin peadra  
Da gaout ouspen eun tam bara.

### An Otrou

Te a so eur potr fin, a velan,  
Tor a meus, tevel a renkan,  
Ma keres dont ganin d'am zi  
Me ginnik did da dijuni.

### Ar Paysant

Nan, otrou, nan, trugarecat,  
Me a meus dijunied mad,  
Hag houspen ze, va boutou lous  
Er c'hamjou a ra re a drous.

### An Otrou

Brao gant da famil a veves  
Deus an douar a laboures ;  
Dre ma lekes soign a courach,  
Ec'h costes ives davantach.

### Ar Paysant

N'e ket avoac'h din beva,  
Red eo da voel miket bep pla,  
Kas eun dornad mad a arc'hant  
D'ar mestr pe na vo ket kontant.

### An Otrou

Pa chomer en eur gomanant  
D'eus pini a sav he arc'hant  
E just d'ar feurmear zo enni  
Pea eur leve divarni

### Ar Paysant

Ya ma na veve ket feurmear  
Ken ker evel ma ve guerset :  
Brema zivoas e deus ar c'his  
Da feurmear en tu all d'ho fris.